

**Taolennou**

**ar**

**Mision**



**A. LAJAT**

**31, Streat ar Feunteuniou**

**MONTROULEZ**



**I — Taolenn an ene touellet er bed  
gand ar pec'hejou kapital**

Taolomp pled war an taolennou  
'Zo mellezour an eneoù,  
O vont d'an Env, hent ar glannded,  
Pe d'an Ifern, hent ar pec'hed.


Ourgouilh, koler luksur, avi,  
Avaristed ha diegi,  
Gand ar vezventi milliget,  
A ra bemdez kals tud daonet.



## II — Taolenn an ene pardonet, o servicha Doue

Lakit urz vat en ho puhez,  
Rag ar maro 'zo didruez ;  
Puns an Ifern en o c'hichen  
'Zo digor frank d'ar bec'herien.

Red eo raktal, a wir galon,  
Digant Doue goulenn pardon,  
Kemeret hent ar binijenn  
O senti mat ouz e lezenn.



### III — Taolenn an ene lezirek ha kaledet er pec'hed

An nep a zo tall da bedi,  
Diegus da zakramanti,  
Euz skilfou lemm an drouk spered  
Ne c'hello ket biken tec'het.

Labourou-sul, dans, ebatou,  
Vil darempred, bal ha skridou,  
Morse ganto, n'eus da c'hedal,  
Met buhez trenk ha maro fall.



#### IV — Taolenn an ene o kenderc'hel start war hent ar Baradoz.

Ar c'hristen mat, noz a mintin,  
Gand e familh yad'an daoulin,  
A glev devot an oferenn,  
A gar kovez, rei aluzenn.

Ar c'hristen mat, gant karante,  
A vir bepred lezenn Doue ;  
Leun a fizians e c'hell gortoz  
E gurunenn er Baradoz.

**Imprimatur:**  
*Le 10 Novembre 1923*  
A. COGNEAU,  
Vicaire Général.